

**15 HA 22
A VIZ MEURZH**

**gant
Gilles Carreric**

**ur raktres
eus an tu kleiz,
keodedour,
ekologour ha
kengred**

Abaoe 2020 he deus gouzañvet Lannarstêr enkadenoù don. Dirak ar barroù-amzer yec'hedel, ekonomikel, sokial ha demokratel eo bet harzet hor c'humun.

Dalc'het hon eus, feal d'ar pezh a vod ac'hanomp : ar c'hengred, ar justis sokial, an ekologiezh ha difenn dizehan ar servijoù publik evit mad an holl.

Da bep mare hon eus graet an dibab da vezañ en obererezh a-dal da bolitikerezhioù broadel a vresk arc'hant ar c'humunioù.

Kreñvaet hon eus an demokratelezh lec'hel, harpet dizehan ar rouedad kevredigezhel, postet en deskadurezh, er yaouankiz, en treuzkemm ekologel, er sevenadur hag er sport. An araokadennoù-se zo frouezh un engouestl a-stroll, kaset da benn e-barzh un Unvaniezh eus an Tu-kleiz emskiantek eus he ferzh : ober eus ar gumun ur ramparzh hag ul lec'h harpañ evit an dud e Lannarstêr.

Un nerzh eo hon skiant-prenet.

Gwarantiñ a ra ar c'hempoell hag ar varregezh d'ober traoù. Diazez ar c'hoantoù nevez eo.

Gant mennad ha fiziañs, pinvidikaet gant energiezhioù nevez e fell deomp digeriñ ur respetat nevez. Kement a draoù a chom deomp d'ober, da sevel asambles, kement da ijinañ, evit ma chom Lannarstêr ur gêr – ur gêriadenn ma vez brav bevañ.



**Lannarstêr,
YOULOÙ
BOUTIN**

Hor raktres a zoug mennozhioù sklaer, oberoù fetis ha gwirvoudel. Gwellwelus-kenañ eo. Stag eo ouzh pemp dae bras a ya d'ober hor c'hevrad respetat.

Ar programm-mañ a vo hon hent politikel evit ar c'hwec'h vloaz a zeu.

Ur gêr a-vent gant an dud eo ha chom a raio Lannarstêr evel-se, lorc'h enni gant he c'harterioù, digor war ar bed.

Ur gêr a warez, a harz, a vod hag a ra traoù.

Sklaer eo hon dibab politikel : hini ur gêr keodedour, ekologel ha kengred.

Peogwir e vo savet dazont hor c'hêr en engouestl, en unaniñ hag gant hor Youloù Boutin.

Gilles Carreric

➤ **EMVOD BRAS**
11 MEURZH • 18H30 • QUAI 9
➤ **GRAND MEETING**
11 MARS • 18H30 • QUAI 9



lanester2026.bzh



Peseurt dazont evit Lannarstêr ?

1

Kêr - kêriadenn(où) Ville - village(s)

Ur gêr ma vez mat bevañ enni, a-gevret, gant kreiz-kêr ha kalonoù karterioù birvidik ha keodedourien o kemer perzh en divizoù.

2

Kêr war-du an ekologiezh Ville en transition écologique

Ur gêr lec'h m'emañ dalc'h an trummadoù ekologel en he c'hreiz hag a c'hallou en em ober diouzh an dalc'hoù a vo warc'hoazh.

3

Kêr enni servijoù publik evit an holl Ville de services publics pour tous

Ur gêr ma'z eo ar servijoù publik ul lodenn eus hor mad boutin evit an holl, a-hed ar vuhez.

4

Kêr enni liammoù etre an dud Ville de liens

Ur gêr m'eo pinvidik al liammoù etre an annezidi-ezed gant ur vuhez kevredigezhel, sevenadurel ha sportel evit an holl.

5

Kêr en tolpad kêrioù Ville dans l'Agglo

Ur gêr hag hec'h annezidi-ezed, obererien eus o Tolpad-kerioù, o sellet pizh ouzh ar politikerezhioù kaset da benn ha lec'h ma'z eo dibarderioù ar c'humunioù ur vammenn a genskoazell hag a nerzh a-stroll.

EMVOD BRAS

Deuit niverus da eskemm tro-dro dazont Lannarstêr.

DIRIAOU 11 A VIZ MEURZH

DA 6E30 NOZ,
DOCKS E KAE 9.

Lannarstêr,
YOULOÙ
BOUTIN

➤ LEC'H KOULZAD KABALIÑ

67 straed Marcel Sembat
savadur Le Parnasse

➤ MEL

contact@lanester2026.bzh
06 02 20 63 82



DAE 1

LANNARSTÊR, KÊR- KÊRIADENNOÙ LANESTER, VILLE-VILLAGE(S)



2020 - 2026

Ar pezh hon eus graet
dija asambles

➤ Adkempenn karter
kerfrehour : 3 000 000€

➤ Skoazell d'ar
genwerzhourien vihan ha lakaat
e plas ar chekenn kevredigezhel
e-pad ar C'HOVID : 120 000€

➤ 5 porzh-skol plantelaet gant
ar servijoù

➤ Sinadur karta ar wezenn

➤ Ur budjed-perzhiañ kreñva
et : 200 000 € ar bloaz

➤ Staliañ ur vodadeg lec'hel
keodedel

➤ Digeriñ ur wengedig war
ribloù ar skorf

➤ LANNARSTÊR, UR GÊR A VUGALE UHEL !

- Kreñvaat ar skolioù publik en ur genderc'hel gant an obererezhioù nevesaat hag en ur lakaat ur preder war an takadoù skol.
- Lakaat war-sav un eil hentad divyezhek publik.
- Kenderc'hel gant an darempredoù a fiziañs gant ar skolioù prevez ha Diwan.
- Kas da benn ar raktres da adframmañ skolaj Henri Wallon ha kendrec'hiñ ar C'huzul-departamant da gregiñ gant studioù evit ar skolaj Jean Lurçat.
- Kreñvaat politikerezh an ti-kêr evit ar vugale hag ar yaouankiz, merker anavezet en hor c'humun.
- Gwarantint un endro madelezh evit an holl vugale en degemerva troskol hag er c'hreizennoù-dudi.
- Digeriñ ar gêr war ar bed hag en em gouestlañ evit derc'hel ar peoc'h.

➤ SKOAZELL BUHEZ AR C'HARTERIOÙ

- Harpañ an intrudu keodedel evit buheziñ ar c'harterioù.
- Aesaat ar c'henwerzh nes.
- Reolenñiñ ar rannadurioù tiez e rannioù evit mirout kalite buhez ar c'harterioù.
- Digeriñ an Ti-karter e Kerfrehour

➤ BUHEZIÑ AR C'HREIZ KÊR

- Broudañ staliañ ul lec'h festus e kreiz-kêr (breserezh, levrdis...).

➤ DIGERIÑ AR GÊR D'AR MOR

- Boulc'hañ un argerzh keodedel evit terkañ ar Blasenn Jean Maurice hag he digoradur war-zu ar Skorf.
- Kreñvaat terkadurioù ribloù ar Skorf hag ar Blavez evel un takad naturel a zudi ha liamm sokial.

➤ AL LANNARSTÊRIZ.ED E-KREIZIK-KREIZ HON OBER

- Kenderc'hel gant difrae ar budjed-perzhiañ en ur vroudañ engouestl ar re yaouank.
- Mont pelloc'h gant kefridioù ar Bodadeg Lec'hel Keodedel.
- Diorren selaou ar yaouankiz en ur staliañ ur « c'huzul evit ar remziadoù da zont ».
- Ober galv d'ar referendom lec'hel.
- Sevel ur gwir da c'houlennata dre sinadeg gant 1000 dilenner ha dilennerez enskrivet war roll dilennidi ar gumun evit sujedoù a denn da gefridi ar gumun.



Ribloù ar skorf



Evit ha gant ar vugale hag ar boblañs e vez savet dazont hor c'hêr.
Ret eo kreñvaat ar politikerezhioù dieubiñ koulz hag ar binvioù demokratelezh perzhiañ e-kreiz jeu identelezh Lannarstêr. »

LANNARSTÊR, KÊR WAR-DU AN EKOLOGIEZH

LANESTER,
VILLE EN TRANSITION
ÉCOLOGIQUE



2020 - 2026

**Ar pezh hon eus graet
dija asambles**

➤ Ur brastres evit ar fiñvusted oberiant : 2 000 000 € evit ar marc'h-houarn hag an dud war droad.


➤ « Top 3 » barometr ar c'hêrioù marc'h-houarn en tolpad-kêrioù.

➤ Tapet live 2 al label natur +

➤ Ur bilañs energetek eus savadurioù ar gumun ha lakaat e pleustr ur steuñv harzusted energetek : 500 000 € a espernoù.

➤ Staliañ un avedur fotovoltak arc'hantaouet gant ar geodedourien war doenn an ti-kêr hag ur rouedad tommder koad e Kerfréhour.

➤ Tremen tost da 60 % LED er rouedad goulaouiñ foran.



Ker war varc'h-houarn.



➤ EN EM AZASAAT DA GEMM AN HIN

- Kenderc'hel da blantelaat e lec'hioù foran, Kalonnennoù-karter hag e porzhioù-skol evit stourm ouzh an tommderioù bras en ur grouiñ enezennigoù freskter.
- Tizhout 100 % « led » evit ar goulaouiñ foran.
- Kenderc'hel da vont buanoc'h gant an treuzkemm energiezh en ur ziorren an energiezhioù nevezadus (bevdolz, fotovoltaek).
- Daspun an arc'hantaouiñ keodedel evit skoazellañ ivez.
- Kizidikaat ar re yaouank ouzh kudenn ar cheñchamant hin.
- Ober kentoc'h gant un urzhiad publik atebek hag a bled gant an endro hag ar c'henemprañ.

➤ MONT HA DONT

- Kenderc'hel da wellaat ar fiñvusted padus gant hentoù sur, kempoell ha dibaouez, e liamm gant ar c'hevredigezhioù implijer-ezed hag an annezidi.
- Kenderc'hel gant ur skoazell evit prenañ beloioù.
- Lakaat war-sav oberoù kizidikaat war surentez an hentoù.
- Kinnig parkañ nevez gwarezet evit ar marc'hoù-houarn en antreoù-kêr peurgetket.

➤ MAGAÑ HAG EN EM VAGAÑ GWELLOC'H

- Derc'hel da strivañ war-zu ar 100 % bio er pretioù kêr en ur gemer harp war ar produerien lec'hel.
- Sevel ur c'heginerezh kreiz nevez padus ha kengred
- Diorren an ispisiri kengred en ur studiañ penaos e c'haller ober gant ur stignad surentez sokial boued liammet gant kevelerien ar vro.
- Arnodiñ ar stignad « ordrenasoù glas » a ro tro d'ar mammoù da zont ha d'o babigoù d'en em bourchas gant produioù fresk bio ha lec'hel a goust izeloc'h.
- Derc'hel da blantañ gwez frouezh war dachenn ar gumun a-bezh.



**Fellout a ra da strollad Youloù
Boutin sevel un tiriad reziliant
ha kengret en ur adlavarout
ha kreñvaat argerzh an
treuzkemm ekologel en ur gêr
diaraoger. »**

➤ BRAVAAT

- Bevenniñ skog gwelet ar bruderezh.
- Derc'hel gant skoazell an ti-kêr evit adkempenn talbennoù an tiez hag ar c'hendioù er straedoù tremen.
- Arnodiñ, diwar c'houlenn an amezeien, al liorzhoù riblenn.

➤ SERVIJOÙ PUBLIK KREÑV

- Kreñvaat monedusted ar servijoù publik kêr evit an holl dud, gant evezh dibar evit ar familhoù unkar.
- Gwarantiñ moned d'ar servijoù-kêr da kement den o chom er gumun.
- Staliañ ur c'henwarezh kêr en ur ginnig d'an annezidi-ezed dedennet ur

golo yec'hed marc'hataet etre ar gumun hag un asurañs.

- Rakwelout ha diarbenn riskloù diskar ar c'hinnigoù preder er gumun dre sinadur ur Gevrat Yec'hed Lec'hel.
- Ambroug oberoù micherour-ien-ezed ar yec'hed evit krouiñ muioc'h a diez mezegel.
- Envel un dilennad-ez dileuriad karget eus an nammidi evit harpañ an enframman.
- Digeriñ un AHDOD nevez e Kerfrehour hag enframman ar poent glas ennañ.

➤ UR MERAÑ EVIT AR-MAB DEN HA KIRIEK

- Envel un dilennad-ez dileuriad karget eus an ingalded Merc'hed-Paotred e bodad-seveniñ ar gumun.
- Derc'hel an darempredoù selaou gant an implijidi tiriadel hag o aozadurioù sindikadel.
- Kelaouiñ an annezidi-ezed diwar-benn ar redioù arc'hant lakaet gant ar gouarnamantoù d'ar c'humunioù ha gervel anezho da vezañ war-sav
- Nac'hañ treuzkas ar barrezegzhioù hep digoll digant ar Stad.
- Bezañ kiriek evit merañ arc'hant ar gumun en ur vestroniañ gwask an tailhoù hag en ur genderc'hel gant an dic'hastiz.
- Pegañ ouzh kinnigoù etik ar garta ANTIKOR. Dieout a ra pep emstriver-ez eus ar roll prometiñ da sinañ ur garta dleadouriezh a c'hello an dilenner-ezed kaout anaoudegezh gantañ.

➤ DEGAS AR SIOULDER

- Lakaat ar sioulder evel gwir diazez an annezidi-ezed. Ur c'hempouez etre dizarbenn, justis sokial, bezañ denel ha moustrezezh eo ar surentez.
- Difenn ur meizad enframmet ha pleustrek eus ar surentez, en ur lakaat ar surentez foran, ar surentez keodedel, ar yec'hed-spered, ar c'hêraozañ hag ar justis liammet gant an annezidi-ezed.
- Embann sklaer atebegzh ar Stad e-keñver ar surentez foran en ur skoazellañ servijoù ar polis broadel a rank kaout a-walc'h a araezioù denel ha dafarel.
- Derc'hel gant ar polis-kêr evel ur polis nes karget da seveniñ diferadoù ar Maer.
- Goulenn ma vo krouet ur c'homiserdi e 3vet kêr an departamant.
- Studiañ ar greadusted hag arnodiñ merañ diouzh goulenn ar goulaouiñ foran.
- Talvoudekaat ar servij hanterouriezh er c'harterioù.
- Derc'hel ar servij dizarbenn arbennikaet liammet gant ar c'huzul-departamant.
- Goulenn ma vo dalc'het gant diwallerien-ezed ar savadurioù a zo pouezus-kenañ o roll nes.
- Stummañ ingal implijidi ar gumun e darempred gant an dud da zizoleiñ ha da henchañ gouzañverien ar feulster en o familhoù.
- Stummañ evit dizarbenn ar re yaouank diouzh dañjerioù an internet hag ar rouedadoù sokial.
- Lakaat war-sav, e liamm gant pennadurezhioù ar justis, ar stignad « degas da soñj d'an urzh », dreist-holl war-zu ar vinored hag a ra berzh.
- Termenañ, kelaouiñ ha dispakañ binvioù evit diarbenn ar riskloù naturel ha teknologel er gumun e liamm gant ar gevelerien a sell outo.



**Ar servij publik zo glad ar re n'o deus
ket anezhañ, un dra diazez d'an emglev
republikan ha gwarantiñ a ra kalite
buhez an holl. »**

LANNARSTÊR, KÊR ENNI SERVIJOÙ PUBLIK EVITAN HOLL

LANESTER,
VILLE DE SERVICES PUBLICS
POUR TOU.TE.S



2020 - 2026

**Ar pezh hon eus graet
dija asambles**

➤ Adkempenn skol Henri Barbusse : 2 400 000€ PTB ha 80 % a yalc'hadoù.

➤ Asantet en deus ar C'huzul Departamant adkempenn hag astenn ar skolaj Henri Wallon.

➤ Ur pol kerentelezh nevez e kreizenn Albert Jacquard.

➤ 14 plas ouzhpenn d'al liesdegemer

➤ Tan glas evit krouiñ ur « pol gerontologel » ennañ un AHDOD meret dindan renerezh ha servijoù derc'hel er gêr e Kerfrec'hour.

➤ Kevatalded merc'hed-paotred : sinadur ar garta europat.

➤ Kresk ebet war feur an tailhoù lec'hel war ar font war ar respetad.

➤ Un dic'hastiz ingal a 500 000€ ar bloaz.

LANNARSTÊR, KÊR ENNI LIAMMOÙ ETRE AN DUD

LANESTER,
VILLE DE LIENS



2020 - 2026

Ar pezh hon eus graet
dija asambles

➤ Kêr c'hoariva : un
departamant c'hoariva er mirva-
kêr


➤ Digeriñ ur c'hlas Bagad

➤ Degemer an « Deizioù »

➤ Adkempennet chapel
Lokunel

➤ Mirout hon eñvor a-stroll :
souten ar strollad istor ha glad

➤ Lannarstêr degemerus :
skoazell d'an Ecoutille



Saint-Guénaël



➤ AR VUHEZ

KEVREDIGEZH E-KREIZIK- KER HON OBER

- Santelaat ar yalc'had skoaziadennoù mont en-dro roet d'ar c'hevredigezhioù e Lannarstêr hag adwelet an dezverkoù deroadur en un argerzh kendivizout.
- Aozañ bep bloaz un devezh evit ar c'hevredigezhioù

➤ SEVENADUR HA SPORT

- Aesaat moned d'ar sevenadur evit an holl dud dre ziorren al lenn foran ha deskiñ sonerezh dre ambroug an oberoù e-maez ar mogerioù.
- Boulc'hañ ur preder a-stroll war programmadur hag abadennoù Kae 9.
- Diorren aozadur ar c'helc'hiadoù prezennoù.
- Kreñvaat an hanterouriezh sevenadurel
- Reiñ ur blas d'ar sevenadurioù kêr ha d'ar pleustroù o tont war-wel.
- Brudañ identelezh ha sevenadur Breizh, en ur skoazellañ an oberoù kevredigezhel.
- Labourat evit kaout live 3 ar garta «Ya d'ar Brezhoneg».



Merket eo Lannarstêr evit buhezegezh ar c'hevredigezhioù, ar sevenadur, ar sport hag ar c'hengred. Krouerez liamm eo hag he deus dalc'hmat ambrouget ar re vreskañ »



- Lakaat ar sevenadur da vezañ ul loc'henn enframman ha lakaat LGBTQIA+ war-wel.
- Reiñ tro d'ar merc'hed da bleustriñ ha d'ober sport.
- Kreñvaat ar stignad « sport yec'hed » evit an holl.
- Kreñvaat Ofis Kêr ar Sportoù evel keveler brientek.
- Krouiñ un ti-jiminas war lec'h ar skolaj Wallon liammet gant an Departamant.

➤ AMBROUG AR RE VRESKAÑ

- Stourm a-enep an digenvez en ur gemer harp war kinnigoù Bodadenn Lec'hel ar Geodedourien.
- Studiañ hag arnodiñ ur raktres tiriadel a yec'hed-spered liammet gant an diazeadurioù arbennikaet.
- Embann hor c'humun evel ur gêr degemerus en ur reiñ an tu d'an dud digenvez ha d'ar familhoù da gaout lojeiz, yec'hed, deskadurezh, boued ha dudi.
- Diorren an abadennoù war-zu ar re gozh.
- Treuzfurmiñ an oaled kozh Le Coutaller evit degemer ar studieren hag al labourerien yaouank.



➤ UN TOLPAD KERIOÙ WAR-DU AN EKOLOGIEZH

- Studiañ hag arnodiñ digoustusted ar rouedad treuzdougen, da gentañ-penn evit ar re yaouank.
- Kinnig, asambles gant an annezidi-ezed, gwellaat efedusted ar rouedad busoù, ha kinnig lakaat Lannarstêr e-barzh brastres finvusted mor IZILO dre grouiñ ur navetenn war ar stêrioù hag ar mor.
- Sevel ur brastres evit an terkadurioù marc'hoù-houarn kempoell diouzh skeul an tolpad-kerioù.
- Lakaat e plas ur politikerezh nevez evit an dour en ur staliañ ar metradoù kub digoust kentañ.
- Sevel stignadoù treuzwelus evit heuliañ kalite an dour en tiriad evit lakaat an oberoù ret da dalvezout.
- Aesaat merañ ar servijoù meret war-eeun.

➤ EKONOMIEZH HAG IMPLIJ

- Diorren dedennusted an tiriad en ur selaou an oberourien ekonomikel evit diorren ar c'hrouiñ implijoù.
- Kempenn hag adkempenn an takadoù labourerezh (Kerpont, ar Rohu).
- Talvoudekaat perzhioù mat ar mor e bro an Oriant en o liesseurted.
- Ambroug steuñvoù adkemer an embregerezhioù en ur genlabourat gant ar gevelerien sokial.
- Mont war-du un « tiriad gant den dilabour war hir amzer ».

LANNARSTÊR, KÊR EN TOLPAD KÊRIOÙ

LANESTER,
VILLE DANS L'AGGLO



2020 - 2026

Ar pezh hon eus graet
dija asambles

➤ Un enebiezh savadurel ha
sonn e-barzh an tolpad

➤ Kinnig ur raktres tiriadel arall
tostoc'h d'an dud

➤ Goulenn ma vefe meret
an dour en un doare sokial :
digoust evit ar m3 kentañ

➤ Goulenn ur Programm
Lec'hel an Annez uhelekoc'h
e-tal enkadenn al lojeiz

➤ Goulenn ur politikerezh font
youlek

➤ Degemer embregerezhioù
nevezus en hon takadoù
obererezhioù (Kerpont hag ar
Rohu)

➤ Embann kenskoazell an ti-ker
gant gopridd an embregerezhioù
en arvar.



Lannarstêr zo ul lodenn eus un diazad bevañ, hini an Oriant Tolpad-kêrioù. C'hoantoù boutin a ouestlo c'hwec'h miz kentañ ar respetad nevez evit sevel ur raktres tiriad rannet. »

➤ LOJEIZ EVIT AN HOLL

- Stourm ouzh enkadenn al lojeiz en ur c'houlenn arc'hantaouiñ digant ar Stad.
- Gwellaat ar raktresoù diloc'h a glot gant budjedoù annezidi an tolpad-kêrioù.
- Sevel ur Steuñv Lec'hel evit enkadenn al Lojeiz evit bastañ d'ar goulennnoù lojeiz.
- Stourm a-enep al lojeiz drouk en ur lakaat war-sav en tolpad-kêrioù doareoù teknikel ha denel boutin.
- Kreñvaat an dougen font (ofis ar c'hengred) evit aesaat ar perc'henniezh sokial.
- Reiñ lañs da obererezhioù hollek evit nevesaat kêr (Oberiadurioù programmet evit Gwellaat an Annez) evit adsevel ar gêr war ar gêr ha produiñ lojeiz padus.

➤ KENLABOUR

- Aesaat kenlodennadur an araezioù.
- Krouiñ un « ti ar merc'hed » a-live gant an tolpad-kerioù.
- Kinnig, da-geñver adkempenn tachenn an diskouezadegoù, sevel aveadurioù evit degemer abadennoù sport bras ha sevenadurel pouezus.



Teuzerezh Breizh

Lannarstêr, YOULOÙ BOUTIN

15 HA 22 A VIZ MEURZH

gant Gilles Carreric



**Fatima
AMEUR DIAB**
Sternar ar velestradurezh
publik



**Caroline
AVAN**
Renerez programm ANG




**Nils
BERTHET**
Gwazour teknikel-ha-
kenwerzhel




**Marie-Laure
BUSSENEAU**
Hep micher



**Hugo
CABON**
Optiker



**Wahmétrua
CILANE**
Gwazour servijoù ospital




**Michel
COLLIN**
Penn embregerezh
obererezh sevenadurel




**Rémy
COQUELIN**
Archer war e leve



**Loeiz
DELLA**
Kenwerzhel asurañsoù
mor



**Carole
DUIC**
Gwazourez evit difrouezhiañ
er servijoù ospital



**Françoise
DUMONT**
Renerez skol publik war
he leve



**Dominique
FOSSE**
Kazetenner



**Nicolas
GARNIER**
Kelenner ar skolioù-meur



**Armel
GONTIER**
Kelenner sport



**Laetitia
GOUPILLON**
Implijadezh kenwerzh al
luc'hskeudennoù



**Julien
HEMON**
Aoditour arc'hant



**Philippe
JESTIN**
Sternar SNCF war e leve



**Philippe
JUMEAU**
Renner skol publik war
e leve



**Belinda
KERARON**
Sternar karg publik
tiriadel



**Julien
KIEN**
Kelenner



**Catherine
LANCELOT**
Klañvdiourez-skol



**Nadine
LE BOEDEC**
Stourmerez kevredigezhel
war he leve



**Annick
LE GAL**
Sternar an arc'hant publik
war e leve




**Patrick
LE GUENNEC**
Morlu Broadel hag UE war
e leve



**Claude
LE HEN**
Gwazourez Deskadurezh-
pobl war he leve



**Sabine
LE HENO**
Ijinourez Naval Group war
e leve




**Guénola
LE HUEC**
Buhezourez deskadurezh
pobl



**Annaïg
LE MOEL-RAFLIK**
Skoazellerez sokial en
ospital




**Pascal
LE NY**
Kargad tiriadel



**Florence
LOPEZ-LE GOFF**
Merour ar gwirioù pesketa



**Emmanuel
MARTINEAU-MARCEY**
Renner gennad mezegel-
sokial



**Mireille
PEYRE**
Gwazourez velestradurel
war he leve



**Véronique
PLESTAN**
Kelenner



**Christèle
RISSEL**
Teknikourez enklask ha
stummañ



**Céline
SORET CELLE**
Kargadez a gefridi



**Jean-Jacques
VALY**
Retred an arsanailh

Muioc'h a ditouroù

lanester2026.bzh

